

(270)

Disput
Entre Simon ar Gontel-Gam ha Pol ar Pri,
Var sujet ar Butun.

Simon.

Bonjour dit, Pol ar Pri ; te eo va mignon qer ;
Eur quel vrued bras a zo oc'hanout er c'hartier .
Clêvet emeus laret , gant eun den eus va zy ,
E voas bet o toug'en peder fals-testeni ;
Hag evit recompans eus eur c'krim gen efroyabl ,
Ec'heus bet eun onz butun , sur out eur mizerabl ;
Ma na g'eres divoal , abars fin ar zizun
E c'heruo ganet sur-avialc'h goal fortun .
Groug'et e vi , serten , ma na g'eres divoal .
Doug'en fals-testeni a zo eur vicher fal .

Pol.

(271)

Ha goas goas ameus - me grêt evit eul lombardun
En em roas d'an diaoul evit cavet butun ,
Hag a voe en ifern enpad mis quengolo ,
O visca an diaoulou hag o torcha o botou ?

Simon.

Ennes so eur fablen ha n'en des get quirion :
N'en em ro den d'an diaoul eus a greis e galon ,
D'an drouc-speret infam , evit cavet netra ;
Ober goab a fell dit , mes dit eo ar goassa .

Pol.

Te a rê ar goassa . Ma ves-tê butuner ,
Hirio em a yaou ha vafje'hoas ar gotejner ;
Ma vafje dit butun varben varc'hoas da nos ,
Te a quitafe creñ da lod er barados .

Simon.

Va choqi bras a res , den excumunug'et .

218

Pa ven goassa butuner a vœ biscoas er bed,
 Ne garfen get sonjal er prez a leveres;
 Guel ve ganén mervel ha caout mil dienes,
 Ha quitat ar butun evel eur ampoezon,
 Ma ve coz din da bec'hi eneb quir na rêzon.

Pol.

(272)

Ja, te lavar se, pa n'en dout get sujet
 Na custum da rutunat eneb fêson ebet.
 Êget eo dit cozeal, pa na zantès ar boan
 En eus eur butuner eb na butun na tan.

Simon.

Me a garre gouzout penos na pe fêson
 Eo deut d'a g'enta 'r butun er vro hag er c'hanton;
 Rac eul louzaouen eo zo cos da vil bec'het,
 Ha carimant an oll a rutun dre ar bed.

Pol.

Ah! pebes gras a rivas Doue d'ar gristenien,
 Pa zigassas ar butun da zoulaji hon angen!
 Penevert ar butun, calz a golje o sqiant;
 Bet so butunerien hag a zo breman sent.

Simon.

Gaou a leres, enfaç, mab hena Lucifer,
 Biscoas n'en deus bet sant a vije butuner,
 Ne g'ever get er Scritur nag er histor ebet,
 Eve eur seul butuner hag a ve sovetet.

(273)

Pol.

Penos, den, malevrus! ha te alfe souten
 Ne voa get Sant Vazge Mestr d'ar Valtouterien?
 Hag a voa en Judee o receo an tribut
 Divar ar quin, ar butun, bernde digant an dud?

Simon.

Guelet rân n'ouzout get an histor - ze erfat;
 Sant Vazge, p'oe galvet a zenchas prest a stat;
 Rac ma vije chomet hepret da Valtouter,
 E voa bet, er douetanç, eur prinç da Lucifer,

Ha c'hoas ne gomzer qet eno eus ar butun,
Nemet ma voa recevet dre an taillon comun.

Pol.

(274) Ne qet ret mont qet-se da glasq an historio;
Eur Rouanez a Frans e digassas er vro,
Hag a voa ataget gant an drouc daoulagat,
Goude bea implijet meur a vedecin mat:
Lavarant dei e colje e quelet;
Mes Doue a zigassas ar butun binig'et,
Erit e soulaji hag e laqat pare,
Ha calz istri-viti zo bet yac'h goudeze.

Simon.

Quir eo, a bep sort louzou zo croiet gant Doue,
Hag himi ar butun e deus eur vertuz crén,
Ha fra ve-i laqet da ober onganchoù,
Es mat ouz ascorn toret hag ouz ar goulisu.

Pol.

Ar Rouanez a Frans ne voa qet gouliet,
Ne devoa bles ebet nag ive ascorn toret;
Ne zante poaz ebet nemet droug-daoulagat,
Ar butun e yac'has hag e laqas erfat.
Davantach erzo mat eus a bep seurt clénvet;
Chasal 'ra ar c'hatar ha scanvat ar speret,
Hag ouz melanconi e soulaj ive 'n den,
En defe eur boan benac, eur spont pe eur angen.

Simon.

(275) Va choqi bras a res, den excumunug'et,
Laret e teu 'n butun da scanvat ar speret;
Er c'hontrol eo: troublet ve dre nery ar butun,
Mellet ha barbouillet evel eur glao curun.

Pol.

Brassoc'h gaou a leves, Doue d'am pardono,
N'eus qet a dud santel na savant bars er vro,
Na implijont ar butun pe en corn pe en fri:
Eus a oll dud ar bed, a bemp e vutun tri.
Ha c'hoas e laran gaou oustren, eus an anter,

220

Rac ma ve grêt eur rol partout dre ar c'hartier,
 Ar velezen da g'enta a vutun oll carzi,
 Ma na leqont en corn, e lagont en ho fri.
 Hag a zo tud santal savet en doctrin vad;
 Ma vije ta eur pec'het, e teujent d'er c'huitat.

Simon.

Ar velezen a fazi qercouls hag ar re all,
 Ne laran get vit qementse, oh! nan, e vent tud fall;
 Rac ar rese so tud fur, habil ha moderet,
 Qercouls gant ar butun evel gant traoù ar bed:
 Nonpas te na da sort zo evel diaoulou,
 Nemet ar c'horn a ve bepret en da c'hinou.
 Da vreg, da vugale o vervel gant defot;
 Eur vech evit caout butun e voerjout da ribot;
 Er rojout evit tri goennec, hac hi o coustout deg,
 Tri goef ha tri mouchouer hag un invis da creg,
 Ar peiz a zo cos dezhi da rei dit mil mallos,
 Ha da c'honit an ifern elèch ar barados:
 Ha c'hoas te e maltretas gant troad eur gos rastel,
 En defot na verze e bras hag e mantel.

(276)

Pol.

Ta, hi a lar se, mes ennes so eur gaou;
 Brassoc'h evit ennes a deu eus e g'inaou;
 Rac pa ve en coler ezeo vel eur serpent,
 Hag e lar din mil injur, traoù vil hag insolant.

Simon.

Ma garfes beza fur ha beza moderet,
 Ha quitat ar butun evel un drouc-speret,
 Da vreg zo eur vreg fur hag eur boanierez vat,
 Mes te zo eur boureo, eur tirant, eur ingrat,
 A deu d'e maltreti pa vang dit ar butun,
 Ha elezez anei ha da vugale da yun.

(277)

Pol.

Penos quitat ar butun Simon an diboclet?
 Quell ve ganén mervel ha bea dibarfoelbriet;
 Rac o tont da vervel n'em be nemet eur boan,
 Hag o verza eb butun e ven bepret en poan.

Simon.

Breman e credan ferm ar pezh emeus lennet
 En eur fabley goechal, pa voan gant va dēnvet;
 Penos voa ar butun a voe coz da Gaim
 Da goea en disesper ha da ober goal fin.
 Rac Caim voa ar c'henta a labouras an douar.
 N'on get pe gant eun tranck p'otramant gant eur bal.
 Un devoe libouret ha destumet al louzou,
 Ha laget gantan oll ar re fall a verniou,
 Erit dont d'o dēvi eno var an dachen,
 Ha teurel al hudu en creis hag en daou-ben,
 Louzaouen ar butun en em gavas ive
 Entoues al louzou all; Caim na vouie doare,
 Gen a zantās ar c'hoez anean o tēvi,
 Hag antren ar mog'et anean en e fri;
 Ma comansas striefial vel eun den arajet,
 Ha da gonsideri petra voa ar sujet.
 Herzent hag en fouilla, ma cavaas un tam had,
 Ne voa get c'hoas dēvet, hag en hanvas Tabac.
 Rac an dud a zonck d'ē Tabac a zo gallec,
 Mes en eun drompla reont, rac serten n'en deo get.
 Tabac so ur gir hebreu a sinifi bodden,
 Pestilans, droug-ar-c'hi, calz a draou all ousten.
 Da biana, Caim a voe genti troublēt,
 P'antreas en e beñ an neryz eus ar mog'et.
 Eun nebeut goude se ec'hervuas Abel,
 Breur unig da Gaim, un den fur ha santel,
 A c'houlas diountān: « Va breur petra c'heus gret,
 » Ma zeo da zantimant ha da speret troublēt?
 — « Evin daonet, eme Gaim, tec'h pront dirae va fag,
 » Pe me a parfoeltro hag a tolo d'am chab. »
 Abel voe gen spontet, ma coeas d'an douar;
 Caim, evel eur c'hi clānvet gant ar gonnar,
 A zaillass var e vreur hag en lazās timat;
 A lazās an douar da ruizia gant ar goad.
 Setu genta massaer voe biscoas aruet,
 Divarben ar butun, louzaouen millig'et.
 C'hoas ne voe get avoalc'h, rac Caim goude se,
 Pa voe bet tarmalet, gourdrouzet gant Doue,
 Pa velas pesort muntri ha crim en devoa gret,

222

A goeas en disesper hag a zo bet daonet.
 Oll diaoulou an ifern, na voe daonet Cain,
 En em gavas gantân na voat en enterin.
 Mar e c'hasjont gantê var eur mene huel,
 Hag e lezjont e gorf da zec'ha en avel.
 Pa voe neuze sec'het ha crazet a fêson,
 En e gargjont gergent demeus a bouldr canon;
 Hag etouez ar pouldr-se e fourjont paqajou
 Demeus an had butun, ebars e oll vemprou.
 Neuze e rejont euy toul ebars en e goste,
 Da zervichout da mors er c'horf millig'et-se;
 Laqat an tan vornean evel var eur c'hanon,
 Ma foeltrijont eur bibennat ebars en peb canton.
 Ha neuze gant eur paqat a vutun infernal,
 Unaz a yas en Spagn, un-all en Portugal;
 Unaz yas en Bro-Zos, un all en Itali,
 En Allamagn, en Holand, er Suis, hag en Turki;
 Mes al loden vrassa a voe stringet en Frans,
 Surtout en Breiz-Izel, d'ou daoni en avang.
 Tolet evoc ive ebars en Normandi,
 Er Chin, en Tartari, er Pologn, er Russi;
 Enfin, stringet e voe dre bevar c'horn ar bed,
 Er fêson-se ar butun a zo bet griennet;
 Hag an oll brovinçou, dre voyen Belzebuth,
 Ha Cain millig'et, evit feurgoll an dud.
 Ha te, evel Cain, a velan a zo prest
 Da goea 'n disesper ha da c'hoari da rest.

(280)

Pol.

Eur basiantet vras ameus eus da glêvet;
 Ma sentjen eus va humor en boa da barfoeltrêt;
 Mes quelet a rân sclêr nout nemet euy azen,
 Ha te grêt da studi, na ouzout get oupen!
 Da argumant zo fos, n'en deo get fontet mat,
 Particulieramant var ar gir a Davae.
 Te lar ezeo hebreu, me lar dit n'en deo get;
 Me a ya d'er souten dre ar pey m'eus lennet.
 Pa voa goechal ar bed abimet en antier,
 Gant an dour an diluch, serten e voa mizer;
 Noe a raz ~~euz~~ arc'h dre ordrenanç Doue,
 Erit en em gonservi, en hag e vugale.

(281)

- (282)
- Pa roe bet er g'is-se pel amzer var an dour,
 E loscas eur vray du darn a lavar eur scout,
 Frit gout hag hi gaffe tam douar dizolo,
 Pe eur mene benac en un tu var an dro;
 Ar vran a eure goab a Noe ar barvec,
 Hag a chomas da zebri qig tud ha qig boened.
 Mes Noe pa velas na devee qet var e c'his,
 A losqas var e lerc'h eur eil goeck eur goulm gris,
 Himi a retsurmas, ar goulmic binig'et,
 Gant un anter-ons butun gant e creis e beg.
 Neuze en devoe joa ar barvec coz Noe,
 Hag en ober eur sarmon eno d'e vugale,
 Var sujet ar butun, ha rezon en devoa:
 Millig'et vo an den na rai ar memes tra.
 Neuze Noe ractal hag en hevel Tabac,
 Nonpas en langach hebreu, mes himi Siriaac.
 Ha pa vez expliqet en langach brezonec,
 E sinifi qelou mad, bonheur bras eb abec.
 Neuze Noe a deuas da laret d'e vugale:
- (283)
- « O perit soign, emezavo, demeus al bouzoze,
 - » Roc onnes so il bouzoouen ha ma c'houfe an oll,
 - » A ro cals a brofit hag ampech ous ar c'holl.
 - » Da q'enta ez eo mat vit en em qonsoli
 - » Ous malis ar qrag'ez, pa vezont en furi.
 - » Laqit eur c'hornedat, sortiet prontamant,
 - » Ermes demeus ho ti evel rag eur serpent,
 - » Ha lirit en latin eur q'iriq mat benac:
 - » Libera nos, Domine, hon dilivrit, Ofiou mat.
 - » A fulgura et tempestate, a leveret goude se,
 - » Dious ar foeldr ha dious an tempest, hon dilivrit, va Doue.
 - » Ha laqit eur c'hornedat var ho patiantet,
 - » Ha souden e sortio ar goler eus ar c'hreg.»
- Brema, Simon, en eal, ha te oufe contesti,
 Na disput ouzin-me, daouest dae'h oll studi?

Simon.

Contesti refen ouzit, ma ves den rezonabl;
 Mes eur den daonet out, se zo incontestabl.

Pol.

Da fri en traon va c'hein, Simon ar gontel gam.

224

Simon.

Ha te yêl gant an diaoul, Pol ar pri, den ifam.

Pol.

Mar car rei din butun, m'en servicho fidel.

Simon.

Mont avoalc'h ri gantay eb na butun na diner.

(Vol. II, p. 270-283.)